

CHANSON AR BIGOUDENNED

Me z'a dober eur ganouen.
 P'am euz paper liou ha pluen.
 Da dud Pont-n—Abat Plogastel,
 Daou ganton braz a Vreiz—Izel
 Elec'h ma zo bigoudenned
 Gant ho goazed montobaned

Touez ar bigoudenned ive,
 A veler kalz kizou neue
 Ha marteze ve mad diouall
 Ouz ar re anezho zo fall
 Pa na veler ket o vivi
 Ann dour morse gant koanteri.

Ho zud koz ma zeutent en dro.
 A ve sabaturet hirio:
 Ho vugale deus troquet kiz
 Michans da blijout d'ar bourc'hiz.
 Ha troquet feson da veva
 Da gaout digarez da eva.

Ar bigoudenned da vragal.
 Ar bleo zestum divar ho zal
 Didan koeffou—bleo alaoueret
 Ar re zo vil a ve kuzet.
 Re prenet dar pardon, dar zul
 Ziskouezont gant taledenn dul.

Var ho fenn giz eur glipennik.
 Zo eur c'hoz tamm bigoudennik;
 Ho dillad all gand ar bordon
 A dol skeud var ho diou chotou,
 Ha c'hoaz ann dra—ze n'eo netra'
 Ouz ann traou int kalz ar brava.

Gand ho zeiepe bedir lostenn
 Int teo evel eur variquenn
 Mes evit lod eo tromp lagad
 Poan deuz kaout eur gotillon Aad,
 Ar bordou all zo var plegou,
 Avezhou var dammou truillou

Lezomp anezo da vragal.
 Gant ho dillad da vad da fal
 Evit komz euz a pardonniou.
 Ar marc'hajou hag ar foariou
 Elec'h m'a ve bigoudenned
 Fichet da blijout d'ar voazed

Ar voazed. gredomp ve ive
Fichet dont da leuriou neve
Siret gant ho bouteier
Gant ho dillad ve bsrdet kaer
Sigarenn pe biben er berg
Oftistaga boommou galleg

Var en tok pedir voulouzen
Evit plijoud dar vigoudenn.
Chadeun ha mont euz a c'hoste
Abalamour m'eo eur giz neve
Ne deo ket dont dar gear abred
Ema ar mont gant ar botret.

Sellet a ve eus ar montchou.
Goude a ve gred signalou
D'ar mer'hed da vont a vont a van den
Da glask bep a vanne melen
Ha na ven ket azezet mad.
Ve dira-z-ho eur voutaillac,

Setu maint en hostaleuri
Ha dira-z-ho pebia hini
Evouf am'lep'a yanve
Merc'hed demeuz an hini Kre
Ha goude ni gomzo Jaouen
Peb hini euz he vigouden

—»Draut-Doue merched' n'hellom ket
Eva guin ardant yel goazed
Na gand auouen mazavfe d'hor penn
E raf deomp koll or bigoudenn,
Mez ar goazed oar ho ardouen
Ziskenn d'eho mellou banneou.

Ar vigoudenied gant ar joa.
A ra ar veu den em jalauogid is sou

—»Birviken n'hellimo xa Douel,
Eva ama eun seurt banne,
Devi a ra ann odivi os oisens et ts'e
Ec'h menargaz na evfomq mui'ev ru

Ar goazed a lavar d'ezho;

— Merc'hed paour ha vecinket mezo
Ne dal ket d'e-hoc'holaret taouler
Vit eva eur hanne, daouj, esguy
Kemerit bramji choaizequi all aunc
Euz ho peg a z'allar vlas fall

Gonde oa evet daou vanne,
Fonnuz re all a giskenna,
Ha na oa muigant ho chistrout
Evit guellet mellou hanneou,
A odivi leun ar verenn, ev a liv ore
Hag ar goad ho sevel d'ho feññ!

Mes ruz eyel eteoiou tan:
Hon tro merc' hed a zo breman
Gouzout a rit goazed m'ervad,
Ema ganeomp foer Pont-n-Abad
Ha var'hoaz ludik teier guech de
Avalou-douar' vo adarre.

Petra va zud a zo evel?
— « Netra nemet kafe koeffet.
Eme an holl dud enn eur vouez.
« Henez ennomp zigazo groez. »
Mes dija oa leun ho bousellou
Ma zeu er meaz a vegadou

Goazed merc' hed a glask neuze
Er meaz monet gant ho c'hafé.
Mes diou teir guech gouezont en dro;
« Ni goazed zo klaon eme-z-ho, »
— « Re mar teze hon euz evet.
« Evit klan, n'e d'oc'h ket, merc' hed ! »

Aoun braz am euz ton da facha
Aun dud ve bot o tisheolia,
Epad eunn nebeudik heuriou.
Azevet eaz cuz an toliou,
O ljakat ar guer da zen i
Hag ar goad eun-ho da virvi.

Euz ar mintin oant distagell
Ho fennou savet goall-huel
Brema gommausont ho plega,
Hag ar c'hlaouren da zivera
Var c'horre ho dilajou kaer
Da c'hortoz ma kouezfont er flear !

Goazed ha merc' het dorn-oc'h-dorn,
Egiz pa vesent dal pe vorn.
A z'a da deuria anñ ~~fanchon~~.
Elec'h eier gant ho friou
Petra ganeomp ze erruet !
Me lakat Fanch ez zon kouezet.

Ar vigoudenn lavar d'ar goaz :
« — Das eo d'eoemp brema sevel c'hoaz,
« Ma evfomp, Fanch. hep a vñnnik
« Enn ti all drant-doue ludik ; »
Savet gant poan er meaz ar pri ;
Var eur bern mein var bern ho fri !

Ma boul c'hurun drant-doue brein.
Va filet teuz var eur bern mein.
Kignet va fri n'oun nemet goët,
Te gast drant-doue a to koët
Me am euz mez o vont d'ar guer
Kollet vo bros, va zavancher l

N'eus ket pell, c'houi a vous c'hoarze.
Joaüs ann eil ouz egile,
Oc'h eva odivi melen ;
C'his pa vije leas dre zien.
Ha brenna teuit d'en en dammall,
Elec'h araok renker diouall.

Guella peuz brema da ober,
Eo klask ho pros, ho tavancher
Tenna euz ho tillad ar pri ;
Louzaonit mor gelit ho fri,
Ha goulenn pardon ouz Doue,
Nerz na evfac' h blrviken re.

C'houi, goazed, klaskit ha tokou.
Chommed var ho lerc'h er poullou
Hoc'h izili torret aozet,
Ar friou kignet louzaouet.
Ha dsskit c'hoaz en em zionall,
Da eva re'benn ar verch lla.

